

17

# GWERZ

ANN

## ITRON VARIA ROSTREN

Mamm zan-tel da Zou- e, I-tronn Varia Rostren, Rou-  
a- nez ar ger- man, se-laouet hon fe-den, Di-go-ret ho  
ti- vrec'h, di-go-ret ho ka-lon, Da rei d'ho pu-gale ho  
pen-noz, ô I- tron !

O Gwerc'hez, rosen gaer, o fleuren binniget,  
A zindan eur voden enn amzer goz savet :  
War lavar Albert-Vraz, da greiz kalon ar goan,  
Er blavez trizek kant oc'h bet kavet aman.

Gand ann den gouiek-man n'euz klevet ar re goz,  
'Save e-mesk ann drez aman eur voden-roz :  
Hag enn pep kouls ar bla ar voden bepred glaz  
A dôle bokedou bete kreiz ar goan braz.

Eunn dra ken zouezuz el lec'h-man digouezet,  
Hag a vije bemde gant peb-unan gwelet  
A lakaz hon zud koz da zellet piz azé,  
'Vit ma vije gouiet petra oa kement-se.

Doud a rezont d'ar bod, dindan-han oe toullet,  
Hag ouz treid ar grouiou kerkent e oe kavet  
Ar c'haeran penn Guerc'hez, livet brao ha seder,  
Evel man e Rostren breman war ann oter.

Oll d'ann douar raktal e taoulinjont gant joa,  
'N eur gâna mil bennoz d'ann Itron-Varia ;  
Ha gand ar veleien ar penn zantel zavet  
Gant respet hag enor oe d'ann iliz douget.

A-dal ma oe klevet ar burzud-man er vro,  
'Teuaz pelerined a-bep tu di-war-dro ;  
Hag ann nep a bede ar Verc'hez hon Itron,  
A zistroe d'ar ger, ar peuc'h enn he galon.

Ha piou a lavaro ar burzudou neve  
A veler, o Mari, enn hoc'h iliz bemde !  
Nag a vad a zigouez gand ar re a c'houlén  
Digan-ehoc'h-hu sikour, Itron-Varia-Rostren !

Zavet eta tud klanv, d'euz ho kwele zavet !  
Evid-hoc'h a-bell-zo n'en deuz ken a iec'hed :  
Mès sec'het ho taërou, zellet war-zu Rostren ;  
Ann Itron-Varia a glevo ho peden.

Tud koz, hep tan na ti, peorien gez hanter-noaz,  
Bugale, n'hoc'h euz ken na tad na mamm ziuaz !  
Eur vamm oc'h euz aman, eur vamm oll c'halloudek,  
Euz he dorn ho pezo ar bara pemdeek.

Ha c'houi zo o oelan, glac'har enn ho kalon,  
Kollet gan-ehoc'h eur breur, eur pried, eur mignon ;  
Pedet ive Mari : he c'hroaz oe poneroc'h,  
Ha bepred hon c'hroaz-ni a ve gant-hi skanvoc'h.

Mès evid-omp dreist-oll, 'vidomp, pec'herien géz,  
Mari a zo eur vamm, eur vamm a vadelez :  
Oll eta 'n eur oélan anzavomp hon fec'het,  
Gant sikour hon Itron ni vezo pardonet.

Feunteun bepred digor, bepred leun a c'hrasou,  
Hag a vad hoc'h euz gret aman d'ann ineou !  
Redet eta, redet, mammen a drugarez ;  
Laket ar peuc'h dre-oll gand ar gwir garantez.

Hon zikouret, Mari, ena poaniou ar bed man,  
Mari, reit d'eomp ann dorn enn hon heur divezan :  
Komzet evid-omp oll dirag ho mab Jezuz,  
Ha ma vezimp gan-ehoc'h enn envou eüruz.

Laket enn Brezonnek gand an Otro MERSER, Person-  
kanton Mael-Kerhaez.

Imprimatur :

† EUGÈNE,

*Evêque de Saint-Brieuc et Tréguier.*

Induljans a zaou ugent de di-gand ann Otrou Eskop a Zant-Briek da  
gement-hini a gâno gand devotion Kantik ann Itron Varia-Rostren.

## GOEL AR GURUNEN

Er blavez naontek kant, an eil a c'houzeven,  
E ma bet kurunet Itron Varia Rostren,  
A beurz hon tad zantel, ar pap Leon trizek,  
Gant an otrou Fallier, eskob a Zan Briek.

War an dachen ganthan, eskibien, beleien,  
O laket war he fenn ar gaeran kurunen ;  
Kement a Vretoned neuz bet gwelet biskoaz,  
E goeliou hanter-est, da ze ar pardon braz.

Euz pevar c'horn ar vro ec'h omp oll diredet,  
Da enori hon mam, Gwerc'hez ar gwerc'hez,ed,  
Darn zo deut diskabel, ha darn all dierc'hen,  
'Vit testeni ho fe da Vam ar gristenien.

Bennoz ha bue hir d'hon eskob biniget,  
Trugare d'hon breuder a Gemper, a Vened,  
A zeu, a rum da rum ; vel-domp-ni Kerneviz,  
Da velet ar Verc'hez da bedi 'n 'ec'h iliz.

D'an oll belerined iec'hed ha baradoz !  
Eur beden a galon evit hon eskob koz ! (1)  
D'han e oe bet laret, gant ar pab zo o ren,  
E vije kurunet Itron Varia Rostren.

J. M. MERSER,  
*person Maël-Carhaix.*

(1) An otrou Eujen-Anj-Mari Bouché, ganet in Rostren, eskob Zan Briek  
ha Landreger.

*Imprimatur :*

A. CHATTON, *vic. gen.*